


Bro-Goz ma Zadou


(HENVELIDIGEZ)

Eur zon dispar, hag a vez kanet e kement leac'h ez eus Bretouned (P. TR.)


Moderato War an ton kaer keumraeg : HEN WLAD FY NHADAU



Ni Breiz-ziz a ga-lon, ka-romp hon gwir Vro! Bru-det eo an




Ar-vor dre ar bed tro-dro! Dis-pont 'kreiz ar bre-zel, hon



Ta-dou ker mad a skuil-haz e-vit-hi o go-ad.

Diskan



O Breiz! ma bro! me gar ma bro; Tre ma vo'r



mor 'vel mur'n he zro, Ra ve-zo di-ga-bestr ma bro!

Ni Breiziz a galon, karomp hon gwir Vro!
Brudet eo an Arvor dre ar bed tro-dro!
Dispont 'kreiz ar brezel, hon tadou ken mad
A skuilhaz eviti o gwad.

DISKAN

*O Breiz! Ma bro! me gar ma bro;
Tre ma vo 'r mor 'vel mur 'n he zro,
Ra vezo digabestr ma bro!*

Breiz, douar ar Zent koz, douar ar Varzed,
N'euz bro-all a garan kemend 'barz ar bed;
Peb menez, peb traonien d'am c'halon zo ker:
Enno 'kousk meur a Vreizad têt!

Ar Vretoned a zo tud kalet ha krenv;
N'euz pobl ken kalonek a-zindan an nenv;
Gwerz trist, sôn dudius a ziwan eno;
Oh! pegen kaer ec'h out, ma bro!

Mar deo bet trec'het Breiz er brezelliou braz,
 He yez a zo bepred ken beo ha biskoaz;
 He c'halon virvidik a lamm c'hoaz 'n he c'hreiz,
 Dihunet out brema, ma Breiz!


TALDIR.

Gwir Vretoned


KANAOUEN EVIT AR GOUELIOU BREZONEK

DISKAN : War dôn « *Sezis Gwengamp* » pe « *Sao, Breiz-Izel* »
 KAN : War eun tön nevez.


Martiale




Gwir Vre-to-ned, tud a ga-lon, var zao! Da ga-na gloar da




Vreiz hor Bro, Ha da zi-ouall ten-zor he bu-ga-le: Ar yez, ar peoc'h, al



li-ber-té; Var zao, var zao! Da ga-na'houez penn Breiz da vir-vi-ken! Breiz da



vir-vi-ken! O va Breiz gant da dou-riou bru-det, Da vor glaz ha da ve-ne-



ziou, Da vruk ruz ha da lann a laou-ret, Te zo koant dreist an oll bro-iou!

DISKAN

Gwir Vretoned, tud a galon, var-zao!
 Da gana gloar da Vreiz hor bro,
 Ha da ziouall tenzor he bugale:
 Ar yez, ar peoc'h al liberte;

Var zao! var-zao!

Da gana ' bouez penn:

Breiz da virviken! Breiz da virviken!

} bis.

I

O va Breiz, gant da douriou brudet.

Da vor glaz ha da veneziou,

Da vruk ruz ha da lann alaouret,

Te zo koant dreist an holl broiou!

II

N' ez eus ket, 'vel etouez hor c'herreg,
A dud vad, seder ha nerzuz;
N' ez euz ket, 'vel en hor brezoneg,
Soniou drant, gwerziou dudius.

III

Hon tud koz, tud leal ha santel,
Start evel hon dero kalet,
A ouezaz miret da Vreiz-Izel
He brud-vad, he nerz, he gened.

IV

Bretoned, savomp hor c'halonou,
Ha touomp e talc'himp atao
Da vale var roudou hon tadou,
Keit ha ma 'z aï ar bed endro!

P. TRÉOURÉ.

Dalc'h sonj !

Lento mf

Dalc'h sonj o Breiz I - zel eus an am - zer Raok ma
oas gwer - zet ha tre - c'het! Pa c'hel - le da vi - bien ker - set se -
der, Soun o fenn, di - nec'h o spe - red. Raok ma oas bet tao - let heb di - fenn ha
paour Din - dan seu - liou poun - ner an es - tren Ha sta - get da vi - ken ouz
e gar - roz aour Ouz da dreid ken te - ner, eur eha - denn

I

Dalc'h sonj, o Breiz-Izel, eus an amzer
Raok ma oas gwerzet ha trec'het!
Pa c'helle da vibien kerzet seder
Sounn o fenn, dinec'h o spered.

'Raok ma oas bet taolet hep difenn ha paour
Dindan seuliou pounner an estren
Ha staget da viken ouz e garroz acour
Ouz da dreid, ken tener, eur chadenn!

II

Dalc'h sonj, o Breiz-Izel, eus ar re goz
O deus luskellet da gavell!
E peb traonienn ha war gribenn peb roz
E klevi o mouez en avel.
An aveliou a c'houez war da blenennou,
A zoug eneou ar Vretoned,
Hag a lavar d'it bemdez o c'hlemmou:
Dalc'h sonj eus da amzer dremenet!

III

Dalc'h sonj, o Breiz-Izel eus ar Morvan,
Eus Nominoe, mestr dispar!
Eus da rouaned, eus ar prins Alan,
Eus ar zent 'deus grêt da zouar;
Eus an Duked vat a c'houarnas ar Vro
Hag eus hano an dud a vrezel;
Eus merdeïdi ha korserien Sant-Malo
A zougas, dre ar bed, da vanniel.

IV

Dalc'h sonj, o Breiz-Izel, eus ar Varzed
A ganas da yez dudius!
Bennoz d'ezo da yez zo beo bepred,
Beo ar brezoneg enorus!
Dalc'homp sonj! Dalc'homp da viken an envor
Eus gloariou dispar hor c'hendadou
Ha n'eus forz pegeid e padfe Bro Arvor
Na zilezomp biken o roudou!

F. JAFFRENOU,
Taldir.

